

## Ar C'hoarec yaouanc.

(507, suite)

Me zo un den yaouanc, evit non get galant,  
 A voar scrifa ha lenn, gonit aour hac arc'hant,  
 Hac a lavaro d'êc'h, endifin va frepos:  
 Nep a choaz ur vestrez, na gousq na deiz na nos.

Ur femelen yaouanc, comparabl eus al loar,  
 Brillant evel an eol, pa bar var an douar,  
 Gant ur zel deus he zrempl [= zremm] en deus grêt languissant,  
 Na ne ro din souden ur remed excelant.

(508)

Arça-ta, va Mestrez, me ya da studia,  
 Vit tremen va amzer ur bloa da viana;  
 Pa retornin d'ar quër, me cert hoc'h eureujo,  
 Nespèt d'oc'h oll lignez ha nespèt a gomzo.

Ne gafen get amañ ur messenger fidel  
 A gasfe evidon d'am douz coant ul lizer?  
 Vit lavaret dezjan da zont incontinant,  
 Va lignez em demez nespèt d'am zantiment.

Bonjour d'êc'h, cloarec yaouanc recevit ul lizer  
 Digant ho Mestrez qez da zont ractal d'ar quër,  
 Rac he zud a fel d'ê ober dez demerzi  
 Nespèt he oll c'horizon hac he oll fantazi.

Ho serricher, va Mestrez, cetu me deut d'ar quër,  
 Dre ma meus recevet eus ho feurz ul lizer,  
 Na da lavaret d'êc'h dont d'en em brepari,  
 Rac me zo deut expres hirio d'oc'h eureuji.

(509)

Va zerricher fidel, qeuz ameus d'oc'h annui,

Tremenet e an amzer em boa d'ho soulagi,  
 Letu pebra a zo : grit evel ameus grit;  
 Choasit ur vestrez all, rac me zo demezet.

Me ne hoar get ganeme evel ar quennili,  
 Pa ve yen an amzer e chanch a fantazi;  
 Me, evit erc'h ha scorn, na rust amzer ebet,  
 En hoc'h andret, va mestrez, e voan fidel bepret.

Me hoar ganen, va Mestrez, evel ar pelicant,  
 A zigor e galon d'an oll antieramant,  
 Hac a zigor e galon eus an oll lapousset;  
 Me cert a gar an oll, ha nen on get caret.

(510) Me hoar ganen, va Mestrez, evel an durzunel,  
 Pa ve collet he far, en em leiz da vervel,  
 En un douves benac pe en ur c'hos vezen;  
 Adieu ta, traitoures, adieu da virriqen.

Ha pa vije qement all o clasq lavaret din  
 E vijac'h traitoures, n'aljen get er c'hredin;  
 Breman er quelan erfat, memes en assuranc;  
 Adieu ta, gouir draitoures, enep va oll fizians.

(Vol. II, p. 507-510.)  
 11 str. numérotées.